

AVEL HON LENNEGEZH O C’HWEZHANÑ (53)

Rozenn *Ronsard* troet kaer gant Frañsez Vallée. Ur *Rozenn* all gant ur barzh dianav. Sed aze rozennoù hag a ra vad dimp. N’int ket rozennoù ar preder, tamm pe nebeut. Nemet war an amzer o vont, o vont, hep na c’hallfemp ober seurt.

Rozennoù frondus en ul liorzho tost d’hon c’halon. Liv, frond ha kened a viromp diouzh ar rozennoù. Unan zo tost d’am c’halon. Degas a ra soñj din eus un amzer bet, met bet gant unan ha n’eo ket me. Ma mamm-gozh Trogeri a lâran. Anna, distagit añnañ mar plij !

Moarvat e ouvezit penaos e oa bet reuz tro-dro d’ar skolioù katolik en 1905. Ni oar re vat zo lod skolidi a oa bet kaset da Spagn pe da Euskadi, lec’h zo liorzhoù frondus ivez, liorzhoù espar. Un eñvor d’hon Jakezed ha d’hon Youenn. Egin ul lodenn dener eus hon lennegezh vodern.

Lod skolidi all a oa bet kaset en tu all d’ar mor, hon mor. Anna, neuze, hag a oa en Landreger dindan skoliata seurezed ar Groaz a oa bet kaset asambles gant he c’hoar Mari, da gêr vihan Malvern, dres a-c’haoliad war ar vevenn entre Saoz ha Kembre, en lec’h oa ur skol all d’o degemer. Ha gant ar seurezed ivez ! Bro an torgennoù. Malvern Hills. Anna ha Mari, Mari aet da Mary du-hont !

Hirik ma danevelliñ, n’eo ket ? Ma, petore liamm gant ar rozennoù eta ? Diwezhatoc’h, kalz diwezhatoc’h em boa bet tro da gavout ur rozennoù anvet « Malvern Hills », dres. Bet prenet digant stal David Austin (Abrighton er Shropshire, sko ouzh ar vevenn gant Kembre). Ha bremañ zo ur re em liorzho o teurel frond, liv flimin, hag eñvor kuñv... Ar rozennoù-se zo a-us d’ur maen-bez a gav din. Trugarekaat da David Austin, mestr ar rozennoù. Moarvat emañ beziet dindan ur pezh boked anezhe.

« Ouzh ar beure ar rozenn
Perlezet gant ar glizh-mae
A lâr d’an neb a dremen :
'Na koantik-holl ez on-me.' »

Da serr an noz ar rozenn
Bet glavik e-pad an dez,
'Lâro gant ur glemmadenn :
'Ez a kuit ar vraventez' »

Eme ar barzh dizanv, marteze klevet gant Anna ha Mari ? Unan diskoachet gant Pêr, hon Pêr-ni, mestr ar bleunioù en o bleuniv, mard eus unan. Ur barzh hag en devoa peuret er memes park evel ar Ronsard marteze ?

Ronsard. Talout a ra ar boan adreiñ tamm kentañ troidigezh pe azasadenn hon Frañsez Vallée :

« Koantenn, deomp da wel't ar rozenn
He doa, en heol-beure laouen,
Diglozet he sae, holl-lirzhin –
Ha n’he deus ket, en endervezh
Kollet liv-flamm he barventez,
'Vel hoc’h hini flour ha livrin ? »

Met rozennoù all zo. Rozennoù preder. *Rozenn Du* Roparz Hemon. Ur rozenn all, *Rozenn miz Du* Abeozen :

« Ar rozenn a weñvo dindan anal miz Du,
hogen Mezheven splann zo c’hoazh bev en he frond
dedennus ha tanav, ma trid ennañ fenez
ene mezevennus an Hañv kaer aet da get.

Dit em eus degaset rozenn Gala-Goañv.

Selaou ouzh ar gentel a ro en ur vervel
ar vleunienn gizidik, gwad ha goularz he liv,
a oar ez eo Ebrel bugel d'ar mizioù skorn.

Ifern an anoued, risklus d'ur galon vresk,
n'eo ken un harlu berr d'ar rozenn divarvel.
Ar reuziad ne bado nag e ankenioù lous.
Gweñviñ 'oar ar rozenn evit kaeroc'h genel. »

« Ebrel bugel d'ar mizioù skorn », « Gweñviñ 'oar ar rozenn evit kaeroc'h genel ». Ur weledigezh, ur vetaforenn marteze. *Rozenn Miz Du* hon Abeozen zo evel un heklek da *Rozenn Du* hon Roparz... hep bezañ unan dik. Heklev ne lavar ket int heñvel, kement-mañ ne lavar ket zo anv eus ar memes awen. Un heklek ret.

« Eno n'eus c'hoarzh na didu,
Tra nemet gloaz, hag an anken, hag azrec'h,
Preder ar spered ha striv an divrec'h,
Ha dremmoù tud glas evel al ludu. »

Gwerzennoù teñval gant hon Roparz. Kempouezet gant gwerzennoù skañvoc'h hon Abeozen, o tegas goanv ur vuhez nevez. Ur c'hempouez ret. Adhekleket gant hon Roparz avat :

« Ur ferveder sioul, ur splannder dic'houlou
A sav, trec'h d'ar galon ha d'he zonkad,
Diouzh ar rozenn, peurbad en he c'hened ».

Harpet war an oksimoroù. Un oksimoraouiñ ret. Un oksimoraouiñ gouest da ezteurel trivliadoù ar barzh dezhañ d'hon c'has gantañ.
Genel en-dro, miret kened er peurbad...
Ul lennegezh a heklevioù pell ha tost eo hon lennegezh. Heklevioù dasonus, joaius, doanius ivez, met heklevioù hon drivliadennoù : « ...ar rozenn, peurbad en he c'hened. ». Hon lennegezh, peurbad en he c'hened.

Herve Bihan

Levrlennadur

Roparz Hemon, *Barzhonegoù*, Al Liamm, 1991.

Frañsez Vallée, *Ronsard*, Sav, Niv. 30, Goanv 1944, p. 30.

Abeozen, *Rozenn miz Du*, Niv. 160, Kerzu 1943, pp. 245-246.

Per Denez, *Barzhaz – kant barzhoneg berr - 1350-1953*, Al Liamm, 1953.